

Gloar d'an tri ferson eus an Drindet santel,
 Da Zoue an Tad ha d'e Vab éternel,
 Ha d'ar Speret glan : d'an tri, un Doue ebken,
 Gloar da virviken !



IMPRIMATUR :

Landerneau, die Maii tertia 1897,

F. CORRIGOU, VIC. GÉN.

Desmoulins, Imp.-Relieur, Landerneau



CANTIC NEVEZ

En enor da Sant Serves

A zo e chouel an 13 eus a vis Mae
 (pardon)


Tonlou an ISTE CONFESSOR
 Pe ton ar PANGE SOLEMNES.

Canomp oll hirio, gant laouenedig'ez,
 Gloar ha meuleudi d'or Patron Sant Serves,
 A zo curunet e bro ar joausted
 Ac an Evrusted.

**

Piou a lavaro peg'en Santel eo bet
 Buez ha maro Sant Serves bennig'et ?
 Evit kement-se ret e ve caout moüez
 An Ælez memez.

**



Douss evel un oan, chast, humbl ha patient,
Morse ne gollas grass caer e vadisiant :
E kever an oll e* voa carantezus
Ha madelezus.

Doug e oll vuez eo bet den a bedén,
Den a orezon ha den a binijen :
Bet eo, en ur g'er, d'an oll dud a iliz,
Ur squer e peb g'iz.

En Iliz Santel eo bet ur sclerijen,
Ur sclerijen gaer, trec'h da hep fals creden ;
Bepred diraza an oll heretiket
A ranke tec'het.

Ac a glavourien ganta bet pareet !
Ac a bec'herrien da Zoue gounezet !
Gant ast e teue, eus pep tu, on tud coz
Da glasc e vennoz.

O ! Patron caret, brema eus an Enyou,
Clevit or Chantic, clevit or pedennou,
Ha taolit varnomp ur sell a drugarez.
Ac a garantez.

On chonservit stard er guir Relijion,
Er feiz catholic, er peoch, en union
Gant or Mam Santel, Iliz Sacré om Salver,
Ha Cador Sant Per.

Autrou Sant Serves, on divoallit bepret
A eneb ar bed, ar c'hib, an drouc speret,
An tri adversour eus or silvidig'ez,
Var ent ar vuez.

Pa z'eo ar bed-ma un draonien a zaëlou,
Varzu on guir vro savit om c'halonou ;
Grit na zizonjimp, nac en deiz, nac en noz.

Gloar ar baradoz !

O ! grit ma z'aimp oll, un deiz, en ho kichen.
Da gacout pers e gloar ar vuez eb termen,
Da velet Jesus, ar saent ac an aélez,
En dro d'ar Verc'hez !